



TALABAO 14

ar gazetenn a ra trouz!



ALAN SIRIS 89

TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032




24,00 L

KARAEZ

28-29-30 a viz EBREL

GOUEL AR BREZHONEG



AOZET GANT STOURM AR BREZHONEG HAG EMGANN

2

TALABAO, embannet gant AN HERE
Kazetenn ar vrezhonegerien yaouank
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



Rener ar gazetenn: Alan DIPODE
© Copyright evit an holl bannadoù
ha tresadennoù gant AN HERE, 1989

Niverenn 14
Meurzh/Ebrel 1989

TAOLENN

Miblen Opalia	4	Jord ar Meur
Biskoazh kement all!	13	Goneri gKersaozon
C'hoariomp...	14	Martial Menard/Alan Dipode
Ar fiñvskeudennerezh	15	Murielle Morvan/Alan Dipode
Ar vleizez	27	Roparz Hemon/Alan Dipode
Ul labour divent	30	Marivon Berr
Ur wech e oa e Ledav...	32	Paol ar Meur
An torr-penn	34	Alan Dipode
Ul llozh en ho kambr	35	Natacha Nabisa/Alan Dipode
Eurêka!	39	Tarzhig

Maketenniñ ha pajennadiñ gant Alan Dipode

Lennerien ger,


Gwall ziwezhat eo bet lakaet ho Talabao e gouloù ar wezh-mañ!
Daoust da vrizhkredennoù zo, n'eo ket gant Talabao 13 hon eus
bet kudennoù, gant Talabao 14 ne lavaran ket... Diskouez a rae pep tra
bezañ a-enep da c'hanedigezh an niverenn-mañ - brav eo ar babig kouls-
koude!... ha gwall izel nerzhioù ar pajennadour (ma gourc'hemenoù a
gengañv, Aotrou Rener!). N'eus ket a amzer da goll: amañ ez echuan ma
lizherig, poent bras eo lakaat Talabao 15 war ar stern!
Ho tigarez a c'houlennomp, lennerien... ha nebeut a olifanted
gouez en ho tiez!
Ken ar wech a zeu,

TARZHIG

G.S.: ohomet eo Fañch ar C'huik sabatuet-mik, sede n'en adkavot ket ar wezh-mañ!
E Talabao 16 e ouezet petra zo a'hoarvezet gantañ...

3

KEMENT-MAÑ A C'HOARVEZAS
DA VARE REN KERC'HLON II
AR FALLAKR... DA NEUZE
EDD C'HOAZH ENWIR E PENN
UR MEURIAD KANTREERIEH
A ENGERZHE AR STEPENNO
DIZAREMPRED...



MIBJEN OPALJA

GANT
J. C. S.
TODU AR MEUR. 81



GOUENN AR BOBLAD-NAN A DA KEN KOZH HAG AN AMZERTIOU KOSHAÑ END-EEUN, HAG ENWIR, LORC'H ENNAÑ GANT E ZIAGEN-
TIDI, A YOURE BRAS O TANEVELLÛ ISTOR MEUR NIBJEN OPALJA: HENOADOÙ AR MEURIAD A VEVE ETRE KOR LLWYN HAG
AVEN ARBETH. O ANV HAG O FINVIDIGEZH A DA HOLLVRUDET, GOUDE TREC'HTÛN WAR O ANEZETEN DOSTAÑ, AR GUC'HIANEO,
O DIJE BELLET KAS PELLOC'H O ALOUBADEG, MET GWELL E VDE GANTO DILEZEL AR BREZEL EVIT AR C'HENWERZH... HA
NEUZE E VDE TREC'NET O ROUE GANT MAC'HEN AN TIAG E SYLERZH, HA ROUANTELEZH LORC'HUS OPALJA A ZEUS DA VEZAN
UN DREVADENN DISTER. BRENAÑ E DA PELL AN ANZER HA RENE BALC'H AR ROUTHZEN KLEWYN HA GWAMYR WAR GLANNOÙ A-
VEN ARBETH, HA NE DA MUI NEMET AR C'HOUN EUS O C'HLOD TREMETET HAG A GENDALC'HE BUHEZ MEURAD ENWIR...





HOGEN ISTAR ENKIR HAG E VEDRIAD A GRO-
GAS DA VAT PA GAVJONT KYMVAZ AR
C'HUC'HIAN NAR O HENT...

PEOC'H DEOC'H-HU, OPALIANO!
EN HO TALC'H ENAON HA NE
VENNAN KET EN EN GANNAN...

ABAOE PEUR ED BET ANKOUAZHET
O ENOR GANT AR GUC'HIANOED
BETEK MA TEU UNAN ANEZHOU DA
C'HOULENN SKOAZELL DIGANT
HIDEN OPALIA?



BOULC'HET NON EUS A-DREUZ, OPALIAN!
TANN SKOAZELL NE'M EUS GOULENNET...
NE VENNAN 'NET TREMEN HERIOU D'UN
ENGANN DIEZROMM, HOGEN NAR BEZ RET
EMAON PREST. NE VO KET EMBARNET
EZ ED KYMVAZ UN DEN DIGALON.



DA BETRA E LAKAFEN NA BUHEZ EN ARVAR
EN UN ENGANN KROG-OUZH-KROG? TRAWALC'H
E VE DIA BANNAÑ NA GOAF DA'Z LAKAAT
OUZH AR BER KENKOULZ HAG UR PENN-YAR!

MARTEZE E CHOMO DA VREC'H
A-SAV PA OUEZI EZ EUS
AC'HANON UNAN EUS DIMEZHAÑ
BELEIEN AR GUC'HIANOED HA MA
OUZON AN HENT DA AZEULDI
UC'HTRYO; DOUE AN DOUEOD?

?!



AN AZEULDI NEVE??! NET...
N'HALL KET BEZAÑ!

DRE AN DOUEOD!

AZEULDI UC'HTRYO, LEC'H GWENDELEK
A VEZE KASET DI, HERVEZ AR VOJENN,
BOGEL KENTAN-GANET HOLL DIEGEZHIOU
OPALIA GWECHALL-WECHALL. MARTEZE
HE DOA GALLET SEVENADUREZH KOZH
OPALIA PADOUT ENO...



NAT, AR C'HASONI KOZH EN
DOA GRAET ENEBOURIEN AC'H-
ANONP N'EN DEUS MUT ABEG DA
VEZAN PELLOC'H ABAOE N'EO
BET FAEZHET OPALIA. MAR
ASANTEZ NON C'HAS DI E
C'HELLFEMP BEZAN LARGEN-
TEZUS EZ KERVER...

DIBAOT A DUO DISAKR O DEUS GWELET AN
AZEULDI NEVET. N'EUS DEUET HINI EN-
DRO AC'HANO. NET N'EUS DIFENN EBET
O VIRET OUZHIN D'HO KAS DI. GRIT
A GAROT GANT HO PUHEZIOU.



ENWIR A GAVE DEZHAN E DA BET DAVEET AR C'HUC'HIAN GANT AN DOUEU EVIT KAS E VEURIAD ETREZEK AL LEC'H NEVET, HA NE DA ANV EBET DA ZALEAN MONT EN HENT. AN ANZER EN DOA GRAET UR SONJ ALL, TRI DEVEZH-PAD E REAS ERC'H, HA BUAN E VOE SAC'HE'T AR C'HIRRI. NA VOE RET DA VIBIEN OPALIA CHOM A-SAV...

N'EUS KET DA DORTAN. NE VO KET AR C'HIRRI EVIT MONT PELLOC'H, HA MAR TRENENOMP AR GOANV AMAN E KOLLIMP AR CHAS NENETI HON EUS DA ADKAVOUT AZEULDI HON HENDADOU...



GWELL AN TRADU EVEL-SE, MARTEZE. NE'M EUS KET FIZIARS ER C'HUC'HIAN-MAN. PIV A DAR NA NE ZEU KET GEVIER GANTAN?



SETU DIRAZON DISKENNIDI AN OPALIANED DISPONT... HA KLEVET MAT ER EUS? AON HOC'H EUS RAK UN DEN EN E UNAN?



EMAN AR GWIR GANT PWINN. AR C'HUC'HIAN-MAN ZO ISKIS E ZOAREOU. SONJ A ZEGAS DIN EUS AN DIAOULIEN SUNERTIEN GWAD A ZO BET FORBANNET GANT AN DIAGED EN HOR STEPENNOU. DRE ANV UC'HTRYO, NE MELEZ KET E VEZ SPONTET GANTAN GWRAGEZ HA BUGALEZ?



EVELATO E TIZHAS ENWIR KENDREC'HEN UL LODENN VAT EUS E VEURIAD. HAG ANTRONOZ, O IENNAH SPLET EUS UR SKLAEAREN, E KEMERJONT PENN AN HENT O LEZEL AR C'HIRRI GANT AR RE N'HOULENT KET MONT PELLOC'H.

AR PENN YADUANK AVAT, A MELE EDO O KOLL BELT. KEHELEREZH AN HENDADOU HAG A DA BET, KANTVEDOU-PAD, DIAZEZ HA PENN-AHEL BUHEZ POBL OPALIA A YAE MAR ZISTERAAT. HA SANTOUT A RAE ENWIR E DA MUI-OC'H-MUI EUS E RE PREST DA BLEGAN DA VELT AN DIAGED...



KYMAZ N'EN DOA RANNET GREK ABAD NA DANT EN HENT. GANT E VREC'H E TISKOUZE AN HENT DA HEULIAN, NA MUT NETRA KEN. KROG E DA ENWIR DA C'HOULENN DUTAR E-UNAN HA NE DA KET BET FAZIET O LAKART E FIZIARS ENNAH. AR C'HUC'HIAN O C'HASE BEPRED WAR-ZU TOLEADOU GOUESOC'H-GOUESAH...



UR SIZHUNVEZH DIMEZHATOC'H E VARVAS TRI DEN ER SKORNEG. URZH A RDAS ENWIR D'O DEVIN EN UN TANTAD SAVET BUAN-HA-BUAN.



MET AR GEUNTOU LATAREK AN HINI A GASAS DA GET NERZHOU DIMEZHAN AR GANTREERZEN.

HAG UN DEIZ, EN UR C'HREIG DIRAPAR...



ECHU EO, ENWIR. N'AIAMP KET GANIT MIJ. RE AC'HANOMP A ZO MARVET DRE BENN DA'Z FOLLENTAZ. CHOM A RAIMP AMAN BETEK DISKORNADEG AN NEVEZ-MARV. JIBOZUS A-WALC'H EO AR VRO DIMP DA HADOUT BETEK ENO.

ARABATI N'HELLIT KET OBER SE! N'NOC'H EUS KET Gwir DA DRU-BARDIN NOC'H HENDADO! AR C'HREIG-NAH A ZO UR BROUENN ENAOMP TOST D'AR PAL!

UN DIVIZ DA VAT EO. HEP DISTRO. P'YNN AN NINI A VO HOR PENN HIZIZIKEN ...



TE IVEZ, ALMYN, A ZO A-ENEP DIN?

DISKROG, ENWIR! DROUG A REZ DIN!



NET PETRA ZO PEG ENDOC'H -HOLL? ENAOMP WAR-NES KAVOUT AR PEZH A GLASKE HON TADOU HA TADOU D ZADOU IVEZ EN ANER... N'HELLOMP KET DISKREGIÑ BREMAÑ!

N'HELLEZ KET KOMPREN OMP AET FAEZH D REDEK WAR-LERC'H UR SOR-C'HEWNT...



N'OUT KET REDIET DA CHOM GANIMP... UR JAV A ROIMP DIT. GALLOUT A RI MONT DA HEUL AR C'HUC'HIAN WAR KAREZ.

DINAC'H A REAS ENWIR KEHER AR JAV HAG EN KUITAAT E GILEED GWECHALL, AET DALL GANT AR GOUNNAR...



NET AET E DA EN TU ALL D'E NERZH IVEZ. AR SKUIZHDER A C'HOUNEZE WARNAN HAG ALIESOC'H-ALIESAN E RANKE CHOM A-SAV...

BEURE AN TREDE DEVEZH, E VOE FAEZHET DA VAT...

KU... KUC'HIAN! NE... NE VIN KET E... EVIT MONT PELL...PELLOC'HI!



HAG ENWIR DISAC'HAÑ DIOUZH E SAV...





HOGOS E DA TIZHET DA BAL GANIT,
OPALIANI MET DAoust HA GALLET
EZ PIJE ASANTIN D'AR WIRIONEZ?



HA KOMPRENET EZ PIJE NE DA EUS AZEULDI UC'HTRYD
NEMET UR C'HENNERZH E DALC'H SKLAVERIEN DEUET EUS
AN EGOR, DILEZET PELL ZO? HAG ASANTEI EZ PIJE
GOUZOUT E TEUE PINVIDIGEZHIOU AR ROUZIEN A GENELES
KEMET EUS UN ESKEMM VIL: GWERZHAÑ YADANKIZOÙ
OPALIA D'AN ESTRENIEN DEUET EUS AR STERED?
... HA GALLET EZ PIJE KOMPREN KEMET-SE HOLL? ...

Neus ken...

biskoazh kement all !...



●-Itronezed hag aotronez, chom a reomp a-sav gant hon abadenn sonerezh dafis evit kemenn deoc'h ur c'heloù... Evel-se e krogas, hanter-kant vloaz zo, skingasadenn Orson Welles, savet diwar levr holl-vrudet H.G. Wells, *Brezel ar Bedoù*, a lakaas selauerien ha splanno'h-splannañ e teue da vezañ e doa e oa Meurzhiz vil o'h aloubiñ an douar !

Emiz Du 1988 e voe ad'hraet an abadenn-se gant ur skingomz eus Braga (Portugal). Gwashoc'h c'hoazh e voe ar bennfoladeg !...

Kregiñ a reas an abadenn deiz-ha-bloaz-se gant un troc'h-keleier-berr o kemenn e oa bet gwelet un dra bennak iskis war ar maez e-kichen kêr. Tamm-ha-tamm e veze roet spisadennoù nevez da c'houzout d'ar selauerien ha splanno'h-splannañ e teue da vezañ e oad aze gant un aloubadenn eus an Douar gant tud o tont diouzh ur blanedenn all. Testoù o doa gwelet "estrañjourien" armet gant bannerezed-laser. Drailhañ ha lazhañ a raent pep tra war o hent. Ur c'helaouenner, trefuet-mik war a hafvale, a oa o tanevelañ euzhvilad armet o vont war-zu kêr.

Diouzhtu e pennfolas an dud ! Met, e-keit ma oa lod o skarañ ar pellañ ma c'hellent diouzh Braga, lod all a zeredas d'al lec'h ma oa bet lavaret e oa bet gwelet an alouberien ; fae ganto, war a seblant, bezañ pulluc'het !

Saver an abadenn a lavaras ne oa ket e bal spourañ an dud. Choant en doa nemetken d'ober enor da Orson Welles. Diaes e oa ober gwelloc'h !...

● Portugal c'hoazh. Glav a ra *bemdez* etre 4 eur ha 5eur goude kreisteiz en ur gêriadenn eus hanternoz ar vro. Zoken pa vez brav-kaer an amzer er c'hêriadennoù all e-kichen. Den ne oar eus pelec'h e teu ar glav-se !

Peder eur nemet pemp.
Ret e vo din kemer ma
disglavier



● Ur bleiz e Breizh. Kavet ez eus bet ur bleiz e Breizh ! E Sant Divi (Leon) eo bet tapet. Tec'het e oa kuit ar bleiz yaouank diouzh ur sirk ha meur a viz en deus tremenet o c'haloupet ar vro. Kudenn ebet evitañ evit bevañ. Ober a rae evel al Iern : mont da zebrñ al loened marv a vez taolet kuit gant ar saverien yer.

Bremañ eo bet laosket hor mignon da redek e Park an Arvorrig, met taolet e vez evezh bras outañ : ur skignerez zo bet staget outañ.

Emañ ar mezeg-loened en deus graet war e dro o klask ur vleiwez evit ma ne'n em gavfe ket ar paour-kaezh e-unanig.

Met arabat e vo dit kaout aon pa'z i da vale dre eno. N'eo ket ar bleizi a grogo ennout. Chas ar joggerien pe ar chaseourien ne lavaran ket.



●-Ijinet eo bet an hunvreoù evit ma ne gavfe ket an nen hir e amzer pa vez o kousket a lavaras ur wezh Pierre Dac, ur fentigellour eus penn-kentañ ar c'hantved.

Ma ! Mar fell dit hunvreal — pe da nebeutañ delc'her soñj eus da hunvreoù — eo ret dit kaout vitamin B6. Hag evit kaout vitamin B6 eo ret dit debrñ goell-bier, diwanachoù ed ha maiz, pe c'hoazh per, orañjez, bananez, kaol ha fav.

an hunvreoù kaer
a vo trec'h d'ar bed.



● Gouarnamant Stad Aostralia ar Gornaeveg en deus divizet lakaet war-sav daou vagad-tud karget da saveteñ ar morviled hag al loened all a ra peñse war ac'hou al lodenn-se eus Aostralia. Da skwer, d'ar c'hentañ a viz Here 1988, e vo saveteet evel-se 32 vlei-z-mor : ret e oa bet stroñañ 1.000 den evit gallout dont a-benn eus an trevell-se.


— Lezennoù droc'h ?

● E stad Norzh-Virginia (Stadoù-Unanet) ez eo difennet-groñs, hervez al lezenn, kanañ fall.


C'hoariomp...

Evel petra?

Diouzh Natacha Nabisa e lavarer e vez seder evel peup gweneg. Ha gouzout a ri ez eo du he blev evel... Evel petra? Klaskit 'ta en dizurzh a zo amañ dindan!




1. Du evel...?
2. Reuzeudik evel...?
3. Tev evel...?
4. Leun evel...?
5. Moal evel...?
6. Plaen evel...?



Gerioù-diri

- 1 .
- 2 . . .
- 3
- 4
- 5
- 6
- 7 .


1. Merk an dazont
2. Tomm
3. Lec'h pesketa
4. Muzuliet e vez
5. Mod pe stumm
6. Prennet e vez
7. Rannig-verb



Ar gael-ifern

Alan Dipode

A B K D E F G H



A-LED

1. Graet hoc'h eus unan aze! - 2. Ger-mell. Amzer vrav. - Ha diwir eo? - 4. Dister e zoare. Disteroc'h c'hoazh. - 5. Koroll an diaoul. - 6. Anv bihan plac'h. Gouel. - 7. Breve ha bruzhune. - 8. Koulouchal a zehoù da gleiz.

A-SERZH

- A. Penn-leue! - B. Penn-leue. - K. War ho penn, pe ouzh treid ar freilher. - D. Kenstagañ div rod. - E. N'eo ket deoc'h! Kensonennoù. - F. Sunañ, pe c'hwezhañ. - G. Nann e London. Na rit ket hervez ar re-mañ! - H. Amañ en grit war an tu gin. Niver.

DIELL

Ar fiñvskeudennerzh

gant Murielle MORVAN

FIÑVSKEUDENNERZH, pe "sinema", evel ma vez lavaret diwar ar gresianeg kinema, "fiñv". Kinnig a ran deoc'h gwelet penaos e vez savet ur film, adal ar mennozh kentañ betek ar poent ma vez diskouezet ar c'hoarlerien o redek d'ar pimperlamm evit diflout a-dre beli ar Robotoù Euzhus...



Brigitte Bardot, c'hoarierez c'hall.

**didrouz!
lusk...
labour!**

Un tamm istor

A-viskoazh ez eus bet treserien ha li-vourien evit skeudenniñ an traoù hag al loened a oa tro-dro dezho. E kevioù Lascaux (Bro-C'hall) e weler an tresadennoù kentañ bet livet miliadoù a vloavezhioù 'zo gant hon hendadoù.

E-pad pell eo bet pal an darn vrasañ eus an arzourien skeudenniñ ar gwirvoud dres evel m'emañ... Gant ijinadenn al luc'hskeudennerzh e voe tizhet ar pal. E 1812 e voe ijinet ul luc'hskeuden-

nerzh gant Nicéphore Niepce (1765-1833). Ur gambr zu e oa, da lavaret eo ur voest gant un toullig war unan eus he zuioù. Dre an toull e teue ar gouloù da luc'hañ foñs ar voest, a oa goloet gant ur folienn baper intrèt gant trenkenn nitrik ha holenoù arc'hant. Gant ar gouloù e teue du an holenoù arc'hant hervez stummoù ha skeudoù ar pezh a oa bet luc'hskeudennet. Brav-kenañ ar gavadenn, met difiñv e chome ar skeudennoù c'hoazh...




E 1895 ez ijinas ar vreurdeur Auguste & Louis Lumière ur benveg all: al luc'hvannerez, a servij da skignañ skeudennoù war ur skramm. Meur a skeudenn difiñv o tibunañ buan-tre (16 skeudenn bep eilenn d'ar mare-se) a ziskouez bezañ ur skeudenn vuhezek.

Pemp den ha tregont a voe pedet gant ar vreurdeur Lumière da sellat ouzh o filmoù kentañ, d'an 28 a viz Du 1895, e Paris. Spontet e voe an arvesterien o welet un tren o tont d'an daoulamm ruz daveto war ar skramm! Tost da 50 film a oa bet savet gant ar vreurdeur Lumière er bloavezh 1895. Filmoù berr-tre 'oant, war-dro ur vunutenn nemetken, en o zouez *Donedigezh un tren e ti-gar La Ciotat*, *An douer douret* hag *Ermaeziaer al labouradegoù Lumière*.

Evit Louis Lumière ne oa ar fiñvskeudennerezh nemet ur benveg skiantel da enrollañ darvoudoù gwirion. En enep, e soñje da Georges Méliès (1861-1938) e oa ar fiñvskeudennerezh ur gwir arz. Get Georges Méliès eo bet ijinet doare ar filmoù a anavezomp: ne chom ket difiñv ar benveg-skeudenniñ, kontet e vez un istor, labouret e vez gant c'hoarierien, klinkadurioù, hag all...

E 1897 e voe diskouezet filmoù kentañ Georges Méliès. Filmoù mut e oant: ne gonze ket ar c'hoarierien. Unan eus brudetañ aktorien vut eo Charlie Chaplin, Sir Charles Spencer Chaplin e anv gwir (1889-1977). Piv ac'hanomp n'en deus ket bet tro da welet filmoù mut get *Charlot*, e dudenn veur?

E gwenn-ha-du e veze savet ar filmoù betek 1921: er bloaz-se e voe diskouezet *Kantreen an dezerezh*, kentañ film gant



Luc'hskeudennerez/luc'hvannerez Louis Lumière

livioù naturel. Gant Herbert T. Kalmus (1881-1963) 'oa bet ijinet an doare-ober *Technicolor* e 1910.

E 1927 e teuas er-maez ar film kentañ gant komzoù, *Ar c'haner Jazz*.

E 1928 e voe gwelet *Goulesier New-York* hag a zo ar film kentañ ma'z eus ennañ, ouzhpenn mouezhioù ar c'hoarierien, a bep seurt trouzoù ha sonerezh o tremen a vare da vare, evel er filmoù a-vremañ. Ganet da vat e oa ar seizhvet Arz...



A gleiz: Louis LUMIERE (1862-1954)

A zehoù: Auguste LUMIERE (1864-1948)




Peadra ar fiñvskeudennerezh

Ar film pe c'hoazh ar goc'henn gizidik a zo ur roll gweñv ha treuzwelus a vez luc'het gant ar skeudennoù. E-kreiz ar roll-se ez eus ur vandennad luc'hskeudennoù disrannet gant barrennoù du. A bep tu eus ar vandenn-se ez eus div renkennad toulloùigoù a dalvez da lakaat ar film da dreiñ. War un tu eus ar skeudennoù ez eus c'hoazh ur vandenn strizh a vez enrolllet ar son warni.

Meur a vent (ledander) film a zo:

- "Super 8", implijet dreist-holl gant an dud troet war ar fiñvskeudenniñ,
 - "16 mm", evit an dud a vicher,
 - "35 mm" evit an dud a vicher ivez.
- Ar filmoù 35 mm an hini a vez skignet er salioù evit ho plijadur!



Gant ar c'hamera (ag al latineg *camera* e teu ar ger kamera. Talvout a ra kement ha kambr - ha soñj hoc'h eus eus kambr zu Nicéphore Niepce?) e vez enrolllet ar skeudennoù hag ar son war ar film. Kalz war-raok ez eo aet ar binvioù-se abaoe amzer ar vreurdeur Lumière met an hevelep doare diazez a zo c'hoazh gant ar c'hameraoù. Gwechall 'veze enrolllet 16 skeudenn bep eilenn ganto. Ne oa mui trawalc'h avat goude 1927: deuet e oa ar son, ha ne yae ket ken buan ar skeudennoù hag ar c'homzoù! Ouzhpenn-se e veze merzet an troc'hadennoù etre ar skeudennoù: ar c'hoarierien a hañvale bout merzet ar c'hoarierien a hiziv e vez enrolllet 24 skeudenn bep eilenn gant ar c'hameraoù, ha ne vez ket merzet an troc'hadennoù ken. Soñjit 'ta: bez' ez eus 52 skeudenn war ur metrad film, ar pezh a ra ur film 10 368 m a hirder evit 80 munutenn - 80 munutenn e pad ar pep brasañ eus ar filmoù a vez skignet er salioù fiñvskeudennerezh.

Al luc'hvanner a vez skignet ar filmoù gantañ war ur skramm. Heñvel a-walc'h ouzh ur c'hamera eo, hogen e-lec'h ur gambr zu ez eus ur c'houlouenn greñv da vannañ ar skeudennoù. Evel-just e vez bannet 24 skeudenn dre eilenn! Mar trofe al luc'hvanner buanoc'h eget ar c'hamera e hañvalfe an dud redek war ar skramm e-lec'h bale. Kement-mañ a c'hoarvez get filmoù kozh (16 sk./eilenn) pa vezont skignet get ur benveg a-vremañ: enrolllet e oa bet 16 sk./eilenn gant ar c'hamera, ha skignet e vez 24 sk./eilenn war ar skramm...



El labouradeg-fiñvskeudenniñ ("studio" a vez lavaret ivez, hervez ur ger italianek a dalvez kement ha "labouradeg an arzur") e vez graet ar pep brasañ eus ar filmoù. Ul labouradeg eo, evit gwir: bez' ez eus war-dro 6 leur-c'hoari a vez klinket hervez doare an istor: tu a zo da ziskouez tiez, straedoù, n'eus forzh petra (ur poull-neuial, da skwer!) Peurliesañ e vez savet al labouradeg-se e-kichen ur gêr vras, nepell diouzh ar mor hag ar menez, e ken kaz ma ve ezhomskudenniñ e seurt lec'hioù. Anavezout a rit sur a-walc'h Hollywood en Amerika! Bez' ez eus ivez Cinecitta ("Kerfiñvskeudenniñ!") en Italia pe Joinville e Bro-C'hall.



A bouez bras eo ar gouloù evit filmañ! Dre ma ne vez ket kreñv a-walc'h sklerijenn an heol (ezhomm ez eus gouloù a-hed an devezh) ez implijer kleuzeurioù bras ha luc'hzistaolerioù a dalvez da lemel ar skeudoù. Kalz re greñv, evit gwir, e vez ar skeudoù degaset gant ar c'hleuzeurioù - mard eo war-dro 60 Watt gallowd kleuzerig ho kambr, ez eo etre 150 ha 5000 Watt hini an ardivinkoù a vez staliet war ul leurenn-c'hoari.

Kalz troioù-pleg a vez ezhomm anezho ivez evit diskouez traoù na c'hallont ket bezañ e gwirionez! Piv 'ta er bed en deus gwelet ur marmouz ken bras ha King-Kong? Evit ma vefe gwelet an hent evel ma vez gwelet gant ar blenier e vez staliet ur c'hamera e diabarzh an oto. Penaos diskouez *An den diwelaus* o wiskañ e dog? Duet penn-kil-ha-troad eo bet ar c'hoarier, ha skeudennet eo bet war ur foñs du hañval. Goude ez eus bet filmet ur gamb e-lec'h an tammoù du: evel-mañ e weler dilhad ha tog an den er vann! Gant Georges Méliès (c'hoazh!) e oa bet ijinet an troioù-pleg kentañ.



Kement film a vez savet a vez gwerzhet d'ar broioù all, setu ez eo ret ober ul labour doubladur evit klevet ur c'hoarier saoz o komz italianeg! Aze ez eo ret labourat gant jubennourien: roet e vez ar c'homzoù dezho, ha diskouezet e vez ar film dezho hep ar son. Ret eo d'ar jubennourien treiñ ar c'homzoù en o yezh en ur glask lakaat o muzelloù da fiñval dres evel ar c'hoarier estren... ar pezh n'eo ket aes!

A-wechoù e vez implijet istitloù evit treiñ yezh ur film en ur yezh all: moulet e vez ar c'homzoù e traoñ pep skeudenn. Evel-se e c'hallot klevet saozneg ha lenn ar c'homzoù brezhoneg. N'eo ket aes avat sellet ouzh ur film istitiet, kalz gwelloc'h eo sellet ouzh ur film doublet - ha gwelloc'h c'hoazh sellet ouzh unan en e yezh orin!



Ganedigezh ur film

Goude bezañ taolet ur sell ouzh rann danvezel ar fiñvskeudennerezh e welimp penaos e vez aozet ur film. Sevenidigezh ur film eo labour arzel ar fiñvskeudennerezh! Krogomp gant an deroù...

Ar steuñvenn

Evit sevel ur film e ranker kaout ur menoz, un istor da gontañ... Anat eo! Graet e vez ar steuñvenn gant ur filmskriver. Bez' e c'hall ar filmskriver ijinañ un istor penn-da-benn, met alies a-walc'h e sav e steuñvenn diwar un danevell bet skrivet gant unan bennak all. Diwar ar gwirvoud e c'hall bezañ savet ur film ivez: ur film kelennus eo neuze.

Ne vez ket skrivet steuñvenn ur film evel ma vez savet un istor boutin: ne vez ket displeget dre ar munud ar pezh a soñj an dud (diaes eo diskouez soñjoù gant skeudennoù!), met kentoc'h peseurt jestroù, peseurt ardoù a reont, hag ar pezh a lavaront, evel-just. A-wechoù e vez implijet un den a zo e vicher sevel divizoù, evit skoazellañ ar filmskriver.

Setu echu an istor. Bremañ ez eo ret kavout arc'hant da gas ar film da benn!



Ar filmebanner

... Ur bern arc'hant (ur bern bras!). Dreist-holl evit ar filmoù a vez graet gant mekanikoù pe klinkadurioù divoutin, pe c'hoazh gant c'hoarierien vrudet...

Ar filmebanner a zo e vicher dastum an arc'hant-se.

Alies e prest e arc'hant dezhañ e-unan (pinvidik e vez ar filmebannerien, pe an darn vrasañ anezho, da nebeutañ!). Peurliesañ, koulskoude, e rank amprestiñ arc'hant digant an tiez-bank. Restaolet e vez an amprestoù-se, pa vez echu ar film, gant arc'hant an arvesterien bet dastumet er salioù.

Ha penaos 'ta e oar ar filmebanner pegement e kousto ar film-mañ-film? N'eo ket diaes: e vicher eo prizañ kement tra a ya d'ober ar film. Adalek an daolenn a dremen el later (3760 L) betek gopr ar c'hoarierez brudet Alwena Pegenker (437 000 L), pe betek fulor ar c'hoarier Bras (2000 L evit 6 munutenn)...

Kregiñ a ra labour ar filmebanner pa vez kinniget ar steuñvenn dezhañ, hag echuiñ a ra pa vez diskouezet ar film evit ar wech kentañ. Dezhañ da zivizout piv a gemero perzh evit sevel ar film: piv a vo rener, piv a raso war-dro ar gouloù, an dilhad, ar c'hlinkañ...



Setu kavet ar filmebanner. Bremañ ez eo ret skrivañ dre ar munud kement tra a vo ret ober evit sevel ar film.

Ar steuñvadur

Diwar steuñvenn ar film e vez savet ar steuñvadur gant rener ar film, a reer ar sevenour dioutañ (evit ar c'hoariva e vez graet al leurenner dioutañ), evit displegañ d'an holl re a gemero perzh er film penaos e vo savet anezhañ. War-dro 50 pajennad a yae d'ober korf ar steuñvenn. Kalz muioc'h a blas a vo ezhomm evit sevel ar steuñvadur!

A-gleiz e vez displeget ar pezh a vo gwelet (ar c'hlinkadur, doare ar c'hoarierien...), penaos e vo filmet an traoù (a-dost, a-bell, a-zindan...), mar rank ar c'hamera fiñval pe get, hag all.

A-zehoù e vez displeget ar pezh a vo klevet: an divizoù, an trouzoù, ar so-nerezh.

E meur a daolenn, a arvest hag a dro-c'had e vez rannet ar steuñvadur - hag ar film ivez, evel-just.

Un daolenn a zo un tamm film enrollet hep na vije troc'het ennañ. Adalek 200 betek 700 taolenn a vez e-barzh ur film boutin.

Un arvest a zo meur a daolenn peget a-steud evit skeudenniñ un tamm eus an istor: ur gaozeadenn, ur gwallzarvoud, un emgann...

Un troc'had a zo meur a arvest peget a-steud. Tremen a reer eus un troc'had d'egile e-kerz ur film pa vez kemmet lec'h penn-da-benn, pa vez kemmet mare.

Deomp bremañ da welat pelec'h e vo savet hor film! Yao, en hent da Hollywood!





Ar c'hlinkadur

En diavaez pe en diabarzh e c'hall ur film bezañ kaset da benn, hep na vije ret sevel ur c'hlinkadur a-ratozh. Gwelloc'h marc'had e koust, evel-just, hogen alies e sav kudennoù: a-wechoù e ra giv pa rank an amzer bezañ brav en istor... Neuze e vez ret gortoz ma parfe an heol en-dro, kollet e vez amzer hag arc'hant! Evit an holl ardivinkoù (kameraoù, kleuzeurioù...) ez eus ezhomm kalz a blas, ha ne vez ket aes filmañ e-barzh un ti boutin. Pensaos ober?

Peurliesañ neuze e kav gwelloc'h ar sevenour lakaat sevel ur c'hlinkadur, daoust ma koust ker-ruz. E-barzh al labouradeg-fihvskeudenniñ e vo savet klinkadurioù hor film neuze, gant straedoù faos, tiez faos, gwez faos, h.a. Evit o fardañ ez implijer preñn skañv, hag ur meskaj plastr ha simant anvet staff.

*

War al leur-c'hoari

Bremañ e krog an traoù da vat! Emañ ar sevenour e penn an holl dud a labour evit sevel ar film. Heuliet e vo ar steuñvadur evit labourat. Dibab a ra ar sevenour an dud a labour gantañ hervez o barregzh hag hervez an doare film a fell dezhañ sevel. Dibabet eo bet gantañ an doare da glankañ, an dilhad... War an dachenn e rank an holl vichere-lourien sentiñ ouzh e urzhioù evit ma vije labourat dres evel a fell dezhañ.

D'ar sevenour eo ivez da ren ar c'hoarierien, da lavaret eo da zisplegañ dezho penaos c'hoari, d'o lakaat da adkregiñ meur a wech betek ma vo c'hoariet dispar! Setu perak e rank ar sevenour dibab c'hoarierien vat a ouezo diouzhtu o-unan penaos c'hoari an dra-mañ-dra.

Ar skoazellerien

Atav e vez daou pe dri skoazeller o sikour ar sevenour. Hepto ne c'hallfe ket hemañ bezañ mestr war holl dachennoù ar filmañ.



Iliz-veur Paris, adinbroudet en Hollywood e 1939

Ar skoazellerien eo a ra al liamm etre ar sevenour hag ar skipailhoù micherel. Alies o devez ar skoazellerien c'hoant da zont da vezañ sevenourien d'o zro! Goude bezañ bet skoazeller war meur a film e c'hellont ren filmoù berr (a bado nebeutoc'h eget un hanter- eurvezh), ha da c'houde filmoù hir (un eurvezh hanter pe hiroc'h c'hoazh).

Ar skript

Script-girl eo an anv e saozneg, eus al latineg "scriptum", skrid. Kement hag "ar plac'h a skriv" e talvez *script-girl* - bez' ez eus paotred oc'h ober al labour-se, koulskoude! Petra eo al labour? Ne vez ket filmet an taolennoù hervez urzh ar steuñvadur. Da skwer e vez filmet da heul an holl daolennoù a dremen en hevelep klinkadur. Lod eus an taolennoù-se a vo e penn kentañ ar film, lod all e-kreiz pe en diwez.

Evel-se ne vez ket kollet amzer o kemañ klinkadur bep tro. Padal, unan bemañ

nak a rank gouzout mat ar pezh a zo bet graet dija, hag ar pezh a chom da ober. Setu labour ar skript. Ret eo dezhi notenniñ pep tra keit ha ma vez troet ar film: dezhi da ziwall e vije gwisket heñvel ar c'hoarierien a-hed un troc'had dreist-holl pa vez filmet troc'hadoù 'zo miz goude ar re all. Soñj am eus eus ur film ma veze gwelet ur mouskeder gant un eurier ouzh e arzorn e-kerz ar film!

Ret eo d'ar skript ivez muzuliañ gant ur padventer hirder an taolennoù evit ma vije sentet ouzh raktres ar sevenour.

Gwelet a rit, evit bezañ skript e ranker bezañ urzhiet-kenañ ha dalc'hmat war evezh! Selaou 'ta, Tazhig!

Ar skipailhoù micherel

Prest eo kement benveg a vo ezhomm evit filmañ, a-drugarez d'ar merour. Eñ an hini a ra war-dro an traoù danvezel: dilec'hiadur ar binviji hag an dud dre garr-nij, tren, bag, karr-tan, boueta ar skipailhoù ha reiñ bod dezho. Drezañ e vez kaset ar c'hochennoù prest bemdez d'al labouradeg a raio war o zro evit o dizolañ.

Emañ ar mestr-oberier war an dachenn ivez. Rener ar sklerijenn a vez graet dioutañ ivez, gant gwir abeg: ret eo dezhañ diwall e vije sklerijennet al leur-c'hoari hag ar c'hoarierien evit ma vije ar skeudennoù dres evel ma fell d'ar sevenour. Evit kement-se e labour gant ur skipailh tredanourien a raio war-dro ar c'hleuzeurioù, al luc'hzistaolerioù. Ret eo tremen kalz a amzer evit prientiñ ar gouleier, gant binvioù niverus ha kemphezhek dibabet a-ratozh evit an daolenn pe an arvest emeur o filmañ.

Filmet e vo an traoù gant an oberier, pe paotr ar c'hamera (*cameraman*) e saozneg). Hemañ a zo kiriek da labour ar c'hamera: e lec'hiadur, e fihvadennoù, hervez urzhioù ar sevenour.

Prest eo ar c'hlinkadur a-drugarez d'ar mestr-klinkour, en doa renet ar skipailh munuzerien, kilvizien, liverien o oa ezhomm anezho evit sevel an traoù.

Ar staliker a rank kavout pe fardañ an arrebauri hag an dankajoù a zo ezhomm evit reiñ buhez d'ar c'hlinkadur.

Kement-mañ evit plijadur hon daoulagad. Hag hon divskouarn?



Emañ rener ar son e-barzh ul logig treuzvelus, gant ar binvioù-enrollañ. Aze e vez enrollet ar c'homzoù hag an trouzoù, ha lakaet e vez tammoù hag an sonerezh bet savet a-ratozh-kaer evit ar film gant ur sonaozour.

War al leurenn emañ paotr ar berchenn evit tapout komzoù ar c'hoarierien. Emañ o terc'hel ur vazh hir a zo staget ur mikro (sonevrer, songresker) ouzh he fenn. Ret eo d'ar paotr tostaat ar mikro ouzh ar c'hoarierien gant ar berchenn, en ur ziwall na vefe ket filmet e zoare gant ar c'hamera.





Emañ ar c'hoarierien... o c'hoari. An darn vrasañ eus ar filmoù a implij c'hoarierien a vicher peogwir n'eo ket forzh piv a c'hall lakaat an arvesterien da vout fromet, da leñvañ pe da c'hoarzhin! Hogen ker e koust implijout steredenned evel Tarzhig pe Natacha Nabisa. Neuze ne vezont implijet nemet evit ar penn-rolloù. Evit ar rolloù bihan e vez graet get aktored... disteroc'h o brud, pe zoken gant tud voutin. Tud voutin a vez implijet evit an arvestoù ma'z eus un engroez, da skwer. Adc'hoarierien a vez graet diouto.

A-raok ma vije troet ar film e rank ar c'hoarierien deskiñ ar pezh o devo da lavaret e-kerz ar film. Evit drevezañ un den istorel, da skwer, e rankint lenn meur a levr diwar e benn evit gallout bezañ heñvel outañ. Mar tremen an istor en ur vro resis e ranko ar c'hoarier anavezout mat ar vro-se evit bezañ heñvel ouzh an dud a zo o chom enni!

Ret eo d'ar c'hoarierien bezañ desket neuze. Ret eo dezho bezañ habask-kenañ ivez: a-raok c'hoari e vint gwisket ha

livet, war al leurenn e rankint gortoz ma vije prest an holl ardivinkoù, da c'houde e vo ret dezho adc'hoari meur a wech da heul, betek ugent gwech an hevelep taolenn! Dav eo gouzout c'hoari en ur zisoñjal ar c'hamera hag an holl vicherelourien a vez en ardremez...

A-wechoù, pa'z eo re zañjereus un daolenn evit ar c'hoarier, pa n'eo ket barrek d'ober un dro-ouesk bennak, e vez lakaet un den all da gemer e garg: graet e vez un eiler pe un eilc'hoarier eus an den-se (war golo Talabao 8 ne oa ket Tarzhig a oa o treiñ tro-dro d'an douar, un eiler Yoran Prevan e anv e oa...).

Disheñvel eo labour ur c'hoarier fiñvskudennervez diouzh hini ur c'hoarier c'hoariva: gant ar c'hamera e vez filmet an disterañ tres war an dremmoù. Evit ar c'hoariva e rank an aktored kreiñvaat o zrivladioù peogwir e vezont pell diouzh an arvesterien.

Ret eo d'ar c'hoarierien anavezout an istor mat-tre evit bezañ gouest da zibunañ o ferzh a-dammoù hag en dizurzh: ha soñj hoc'h eus e vez filmet a-wechoù troc'hadoù eus diwez ur film a-raok re ar penn kentañ?

Pegement a adc'hoarierien er skeudenn-mañ?



Gwisket e vez ar c'hoarierien hervez doare an istor gant dilhad bet prietet gant an dilhataer hag e skoazellerien. Gwechall e veze meneg eus merc'hed nemetken evit al labour-mañ, hogen kemmet eo bet penn d'ar vazh abaoe...

A-wechoù ez eo ret d'an dilhataerien regiñ dilhad nevez pe o c'housi a-ratozh evit ma klotfent gant doare an daolenn!

Ret eo d'an dud chom e-kichen al leurrenn evit adstagañ un nozelenn pe adwriat ur pezh dilhad bet roget dre fazi.

Livet e vez dremm an aktored a-raok pep taolenn, evit ma vefe disi e neuz dirak ar c'hamera. Nebeut a dud a oar livañ o dremm o-unan: peurliesañ e vez graet gant dremmlivour skipailh ar film. N'eo ken aes e labour hag hini ho c'hoar henañ a dremen eurvezhioù dirak he mele-zour kent krediñ mont er-maez! A-wechoù ez eo ret dezhañ lakaat roufennoù ouzhpenn war dremm an aktor evit ma hañvalfe bezañ koshoc'h (ar c'hontrol-rik eo a vez graet gant ho c'hoar...). Gwechoù all ez eo ret d'an dremmlivour kenmañ penn-da-benn neuz un den evit e lakaat da drevezañ un den brudet: aze e vez implijet barvouskennoù, barvennoù ha mourrennoù faos, ha liv e-leiz evit kenmañ stumm an daoulagad, roufennoù an dremm, hag all. Gouzout a reont fardañ goulioù faos, gwenaennoù faos, eeec'h! Gouest int da adsturmañ korf un den en e bezh!



Ursula Andress, c'hoarierez suis, gant he dilhataerez

Al labour michere!l

Gouzout a rit ervat ne vez ket filmet un istor en e bezh en un taol: filmet e vez dre daolennoù.

"Peoc'h! Treiñ 'ra!" Ar c'hamera a ya en-dro, enrollet e vez pep trouz gant rener ar son. A-raok diskouez d'ar c'hoarierien kregiñ e vez lakaet un daolennig zu daou damm enni dirazo, ar c'hklap - KLAP! eo an trouz a glever pa vez serret an daolennig. War ar c'hlap e vez skrivet anv ar film, anv ar sevenour, niverenn an daolenn. Evel-se pa vez sellet en-dro ouzh ar skeudennoù enrollet ez eo aesoc'h gouzout petra eo an daolenn-mañ-taolenn. Paotr ar c'hlap a vez graet diouzh an den a ra war e dro.

Niverenn an daolenn

An livet gwech eo e fileur anezhi!

Anv ar sevenour

Talbenn ar film





An doare da filmañ

N'eus ket div daolenn heñvel o fad, o ment hag o fiñvusted: seul liesoc'h e vo doareoù an taolenoù, seul arzel ha dedennus e vo ar film.

Pa vez savet ar steuñvadur gant ar se-venour e soñj hemañ, da gentañ penn, e lec'h ar c'hamera e-keñver ar c'hoarie-rien pe an traoù filmet: ha pell pe dost e ranko ar c'hamera bezañ? Ha dre zindan pe dre zioc'h e vo filmet? Ac'halese e teu skeuliad ar skeudenoù, a zisplegimp deoc'h diouzhtu!

Ur skeudenn hollek a ziskouez ur gêr en he fezh, ur gweledva, pe c'hoazh ur gambr, ur bagad tud.


Gant ar skeudenn etre e vez diskouezet an dud penn-kil-ha-troad.

Ne vez ket graet kalz ken get ar skeudenn italian, a ziskouez an dud eus o fenn betek o daoulin. Kalz boutinoc'h eo ar skeudenn amerikan: gwelet e vez an dud eus o fenn d'o divlezh.

Tostaomp gant ar c'hamera: filmet e vez an dud eus o fenn d'o gouriz gant ur skeudenn zamdost. Tostaomp c'hoazh: gwelet e vo an dud ag o fenn d'o bruched gant ur skeudenn nes.

Pa vez ret pouezañ war doare un aktor e reer gant ur skeudenn a-dost. Aze ne vez gwelet nemet penn ar c'hoarier(ez!).

A-benn ar fin, pa zeu an istor da vout reuzc'hoariel-kenañ, e c'haller diskouez lagad pe dorn un den gant un enlakadur.



Skeudenn etre eus Raquel Welch, c'hoarierez amerikan



Gwall drist e vefe ur film ma chomfe difiñv ar c'hamera! Setu e vez c'hoariet gantañ evit kaout skeudenoù all.

Tu a zo da lakaat ar c'hamera da dreif war e ahel evit kaout ur skeudenn hollwelek: pa dro ar c'hamera eus un tu d'e-gile e vez graet ur skeudenn hollwelek a-blaen; ur skeudenn hollwelek a-serzh a vez graet pa dro ar c'hamera eus an nec'h d'an diaz pe gontrol.

Alies e vez lakaet ar c'hamera war ur c'harr bennak evit ma ve filmet ar pezh a zo war e hent: un travelling eo neuze, hervez ur ger saoznek a dalvez kement hag "ar beajiñ".

Un doare all a zo gant ar sevenour da ziskouez e ampartiz: ar c'hornad eo.


Hervez kornad ar c'hamera e-keñver ar pezh a zo filmet e c'haller diskouez ez-resis aergelc'h un daolenn. Evit hol lakaat da santout pegen gwidiluz e oa aergelc'h un daolenn en doa ijinet ur sevenour filmañ gant ur c'hamera stouet war e ahel: sebezus e oa an doare!

Pa vez filmet ur gaozeadenn etre daou zen e vez meneg alies eus tachenn hag eneptachenn war ar steuñvadur. Amañ ez eo ret filmañ war-eeun da gentañ (dremm ar paotr a zo o komz, da skwer), ha rak-tal goude war an tu-enep, evel m'e defe graet ar c'hamera hanter-tro: aze e vo gwelet dremm ar plac'h a respont d'ar paotr a zo dirazi.

A-wechoù e vez filmet an traoù gant ur c'hamera a zo bet lakaet a-us d'al leurenn: ur splujskeudenn a reer diouzh an doare-mañ, dre ma hañval selloù an arvester splujañ etrezek al leurenn. Ya, ha pa vez filmet dre zindan? Un enep-splujskeudenn eo, evel-just!



Splujskeudenn



Enep-splujskeudenn

Un doare da ober un travelling





"Troc'hit!"

"Troc'hit" en deus huchet ar sevenour goude an daolenn ziwedhañ. Chomet eo ar c'hamera a-sav, lazhet eo bet ar gouloù, aet eo an dud da zebriñ ha da ziskuizhañ - ar merour, eñ, a zo aet d'al labouradeg da zegas an troc'had diwezhañ. Echu an traoù war al leurenn, hogen ur bern labour a chom d'ober c'hoazh!


Ret eo lakaat an taolennou en urzh, da sevel arvestoù a vo lakaet en urzh da sevel troc'hadoù a vo lakaet en urzh da sevel ar film a welit war ar skramm!

Gant ar sevenour e vo dibabet an taolennou mat a-douez ar re 'zo bet filmet, en ur heuliañ pizh ar steuñvadur. Bremañ e vo labour ar frammer pegan an taolennou a-steud (gant harp ar c'hlap!) evit sevel ar film en e bezh. Meur a viz e

pad al labour-se. Ret eo d'ar frammer advelet ar film war ar skramm meur a wech, da c'houzout hag-eñ ne vank ket un daolenn bennak. War ur vandenn all eo bet enrollet ar son get rener ar son: pa vo bet troc'het ar film ha peget an taolennou e vo ret d'ar son bout kempred gant ar skeudennou, evel-just!

Setu prest ar film. Bremañ e vo kemeret tammoù anezhañ - ar re fromusañ - evit sevel ur film bihan, ar vandenn-embann, a vo lakaet da dremen er salioù evit reiñ un tañva eus ar film nevez. Ur bern argant a vo ret dispign c'hoazh evit brudañ ar film nevez, da vroudañ an dud da vont d'e welet er salioù. N'eo ket aes an traoù ken abaoe krouidigezh ar skinwel arnevez!

*



LUC'HSKEUDENNOÙ

P.15: Brigitte Bardot, film "La vérité" gant H-G Clouzot, 1960 - P.16: HOLMES-LEBEL/Boyer - P.20: dastunadenn J-St. RETEL - P. 21: HOLMES-LEBEL/Globe photos - P.22 ha 23: HOLMES-LEBEL/Camera Press P.24: Raquel Welch, film "Flare up" gant James Nielson, 1969.

Ar vleizez


Roparz HEMON

AN AMZER ma oa bleizi e Breizh, e veze kontet kalz marvailhoù diwar-benn al loened ferv-se. Ar re spontusañ anezho a oa diwar-benn ar c'hrouadurioù iskis, anvet *tud-vleiz*, a oa tud e-pad an deiz ha bleizi e-pad an noz.

An dud ouiziek a lavaro n'eus netra da grediñ e kement-se, ha ganto emañ ar wirionez, sur e-walc'h. Ar brederourien a zispiego deoc'h n'eo kement-se netra nemet ur skeudenn, un arouez eus spered mab-den, a-wechoù mat ha skiantek hag a-wechoù kriz ha fallakr evel ar gwashañ aneval. Evidon-me ne rin amañ nemet kontañ deoc'h un dra a ouzon. Ha mar gallan ober plijadur deoc'h, gwel a se.

Va marvailh a zo souezhus, abalamour n'eus ket ennañ, evel en holl varvailhoù all diwar-benn an dud-vleiz, un den kozh, sorser pe dorfedour, o vevañ e-unan-penn en un toull bennak e-kreiz ar c'hoadoù, met ur plac'h yaouank, kaer-meurbet, hag a veve e-mesk an dud en he maner, e parrez Trebabu, etre Brest ha Konk-Leon.

Stella e oa hec'h anv, un anv na veze ket roet alies en hor bro, zoken da verc'hed an dudjentil en amzer-se, war-dro ar bloavezh 1700. Pelec'h, a leverot, em eus klevet an istor-mañ? Ne'm eus ket klevet anezhañ. Ne ran, e gwir, nemet lakaat e Brezhoneg ar pezh am eus lennet e paperoù kozh, skrivet gant un denjentil en deus hec'h anavezet.





"E oan neuze," emezañ, "ur paotr yaouank seitek vloaz, hag e oant aet sot-pitilh gant Stella, evel holl dud-jentil yaouank ar c'harter. N'eo ket c'hoazh e oa kaer, met un dra bennak a oa en he daoulagad na'm eus gwelet morse e daoulagad den ebet: lavaret a vije bet ne sellent ouzh netra, atav e vezent difiñv, ha don, ha du, ken du hag he blev du-bran. Ne oa Stella na trist na laouen. Ne igomze ket alies. He spered a oa dal-c'hmat evel un tammig nec'het, ha koulskoude e oa pinvidik, hag hervez ma ou-iemp, dibreder.

*

Un nozvezh c'hoañv - an 20 a viz Genver 1702 e oa, - e oamp ur bagad tud yaouank, bodet e maner Kêrfilli, er sal vras, en-dro d'an oaled. Bez' e oa eno gwazed eus ar manerioù tro-war-dro, mes maouez ebet, nemet merc'hed an ti. An amzer yen, marteze, en doa miret outo da zont, pe ivez ar spont rak ar bleizi, a oa stank-meurbet, dreist-holl er c'ho-oadoù bras en hanternoz, etre Lokournan ha Trebabu. Ar gaoz a zeuas war Stella.

- Marteze, eme unan, he deus bet aon rak ar vleizez vras.

Er goañv-se, ne oa anv nemet eus ur vleizez a gantree dre ar vro, hag a oa brasoc'h, hardisoc'h ha krisoc'h eget ar bleizi all. Kalz tud o doa he gwelet, mes kaer a oa bet lakaat pejoù, pe mont a-vagadoù, tudjentil ha kouerien, d'an argad, nikon ne oa deuet a-benn d'he lazhañ pe d'he fakañ. Al loen-se a oa fin, ken fin hag un den.

Ma, dre-forzh kaozeal, hag evañ gwin ha gwin-ardant, e oa tommet ar pennoù hag e oa an holl o fougeal, pa savas unan e vouezh:

- Aotrounez, emezañ, evit echuiñ an nozvezh, ha ma'z afemp da chaseall!

Ar merc'hed a glaskas enebiñ. Mes ne oa netra d'ober gant ar baotred. Setu-ni buan er-maez, evel ma oamp, lod gant fuzuilhoù, lod all gant klezeier.

Me ne'm boa netra nemet va c'hontell. Sklaer e oa an noz. Met sklasmus e oa an avel, ha keuz a zeuas prim d'ar re ac'h-anomp na oant ket re vezv evit kompren an taol-follentez hor boa graet. Edomp o vont, ne ouiem ket da belec'h, e-kreiz ur vro brein gant loened marlonk ferv.



E oamp daou pe dri asambles, o kerzhet a-dreuz ur bodad gwez uhel, pa glevjomp souden ur yudadenn a lakaas va c'halon da skrijañ. Un taol fuzuilh a strakas, ha neuze daou, ha tri, ha pevar, ha netra ken.


Me 'lavar deoc'h e oan spontet. Ha me da redek, evel pa vije krog tan an ifern em divesker. Redek a ris evel-se ur penad. Neuze e rankis chom a-sav da zialanañ. Edon va-unan. En-dro din, netra nemet sioulder ha teñvalijenn.

En un taol-kont, rag-eeun dirazon, e tigoras ar strouezh, hag ur pikol loen a sailhas warnon. Va c'hontell a oa gan-in em dorn. He sankañ a ris - broudet gant ar spont, hep gouzout mat pezh a raen - en e gorzailhenn. Ne'm eus soñj eus netra - rak semplañ a ris raktal - nemet eus divskouarn al loen, a welen sklaer war an oabl, hag eus ar yudadenn a reas pa voe gloazet - neket yudadenn ur bleiz, mes ur garm skiltr, etre garm ur vaouez hag ur bugel.

Ne'm eus ket kalz da lavaret da echuiñ.

Antronoz e voe kavet Stella en he gwele, marv, un toull en he c'horzailhenn.

Ha ne voe mui gwelet ar vleizez vras morse."





UL LABOUR DIVENT

Un divivadell evit kregiñ: hervezoc'h, peseurt oberenn zenel a c'hall bezañ gwelet eus al loar hep na ve ezhomm eus ur benveg bennak? Hervez ar steredourien atav n'eus nemet unan: Moger Vras Sina eo.


Moarvat ez eo ar voger vras-se brasañ labour biskoazh graet gant mab-den. Redek a ra a-hed war-dro 4000 Km, eus Mor Sina betek an Tibet. Kroget e voe al labourioù e 214 kent Jezuz-Krist gant an impalaer Che-Houang-Ti, an hini a savas ar remziad Ts'in. Re alies e veze aloubet gant e amezien ag an hanternoz a soñje-eh, hag evit en em wareziñ diouto e tivizas gronnañ e vro gant ur voger vras didroc'h, dre genstrollañ tammoù mogerioù-kreñv a oa bet savet gant e ziaragerien. Ar Voger Vras ne ra ket un ceunenn; ur wech an amzer e laosk ur vrec'h a astenn evit mont da zifenn ur geoded.

Sevel ar Voger Vras

E-kichen Mor Sina e krogas al labourioù. Da gentañ e voe kleuziet div fos

eizh metrad etrezo, ha neuze e voe berniet mein ha brikennoù betek c'hwec'h pe seizh metrad. Leuniet e voe neuze an diabarzh gant douar. Ur voger-harp a voe savet ouzhpenn a bep tu. A-dreñv ar voger-harp-se e c'helle ar soudarded, gwaregerien dreist-holl, en em zifenn. O poaniañ e labourer holl wazed Sina, tud a bep renk: prizonidi, laeron, muntreien, met ivez gouizieien ha kourerien. Ur bern anezho a varve gant an diouer a voued hag a zilhad. Bountet e veze ar re glañv da labourat a-daolioù-skourjez. E-mesk douar ar Voger e veze taolet ar re a varve war ar chanter.

Evel-se e voe graet ar 500 kilometrad kentañ, gant mein a voe ret d'al labourerien stlejañ betek lein ar menezioù a-wechoù. Pelloc'h e voe kavet pri kalet hag implijet neuze kefoù gwez bras lakaet da gentañ d'ober div voger genstur.



Disehan neuze e karge-diskarge al labourerien pri a gasent e-barzh div baner istribilhet ouzh ur wialenn vambouz douget ganto war o divskoaz.

Tud all a oa aze evit kailhotiñ ar pri (e choukañ gant o zreid). Pa veze echu ul lodenn e veze tennet ar c'hefoù gwez kuit. Chom a rae neuze ur voger e pri kaletañ.

A-boan echu gant ul lodenn e veze staliet soudarded. Kreñvlec'hioù a oa bep 1600 m ha tourioù-ged er Voger bep 200 m.

A viz da viz, a vloaz da vloaz ez ae al labourioù war-raok, gant ar menezioù, dreist d'ar stêrioù...

Pegeit amzer e padas al labourioù? Diaes en gouzout ervat. War-dro ugent vloaz moarvat, hervez lod. Lod all a lâre e voent echuet kalz diwezhatoc'h, gant warlerc'hidi an impalaer Ts'in.

Efedus e voe ar Voger Vras. E-pad pevarsek kantved e viras ouzh marc'heien an hanternoz a aloubiñ Sina.

En trizekvet kantved e voe tremenet evelkent gant Gengis-Khan. Aloubet e voe Sina gant ar Vongoliz e-pad ur prantad.

Goude ar Vongoliz e voe ar galloud get ar remziad Ming, adalek 1380 betek 1644, ha ganto e voe ledanaet ha kempennet ar Voger Vras. E 1644, goude tregont bloavezh seziz, e voe tremenet ar Voger Vras adarre, gant ar Vandchouiz ar wezh-se.

Ar Voger Vras hiziv an deiz

Ul lodenn nemetken eus ar Voger Vras a c'haller gwelet hiziv a oa bet savet dindan ren an impalaer Ts'in. Oberenn remziad Ming eo ar peurrest.


E ratre vat emañ c'hoazh tammoù zo, p'emañ tammoù koshoc'h krignet gant avel ar stepennoù. Uzet int bet betek dont da vezañ torgennoù a zaou pe dri metrad uhelder.

Kreñv eo bet Moger Vras Sina, hogen kreñvoc'h c'hoazh eo an amzer o tremen!

Ur wech e oa e Ledav...

FETEIZ E TIVARC'HIMP
DORIOU GWENED!
DEOMP DEZHI!!

FETEIZ E VO
PILET AR FRANKED
GANEOMP!!!



E KEIT-SE, E GWENED



BOULC'HURUN!!




EMAN LU AR VRETONED
O SKEIN TREMA
HOR C'HEDEDE!

NE C'HELLUMP KET
DERC'HEL PENN... AN DARN
VRASAN EUS AR SOUDARDED
A ZO BET GALVET GANT AN
IMPALAER EVIT STOURM
A-ENEP D'AR SARASINED!

GOUZOT A OUZON E RA DIOUER
AR GADOURJEN-NE VERN HA PA VEFE
NEMEDON O TOUGEN UR C'HEZE
E CHOMFEN DA ZIFENN GWENED,
GANT AR FEALON D'AN IMPALAER.

DRE CHAÑS NE RA KET D'IOUER
AR BIGI ER PORZH EVIT TACHEL
KUIT



PAOL AR MEUR

ECHU AL LABOUR
GANIT?

YA, KABITEN! KEN NIVERUS EO AR SPONTAIHOÙ E-HARZ
AR RAMPARZH MA VEFE LAVARET EMAN HOLL SOU-
DARDED AN IMPALAER O C'HEDAL KEN NA
ARGADFE AR VRETONED DAONET-SE...




NAG A SOUDARDED
ENDRO D'AR GEODES!
N'OMP KET EVITO,
NA TOST!...
FURC'HEDE DEOMP CHOM HEP
MONT DEZHO HA
DISTREIN WAR HOR
GIZ...

MALDZH
RUZ!!



SACHAN A
REONT O
SKASOÙ

DEUET EO
GANEOMP!



PANEVET E OA KRAS
AR GEOT E-KICHEN
AR MOGEROÙ

E VIJE BET MIRET
GWENED
GANT
AR
FRANKED!

(NEUS KEN)

AN TORR-PENN

Pouez ur c'hanol

E diwezh ar c'hantved tremenet, e parrez Langenan, e tivizas an aotrou Maer lakaat ur c'hozh kanol da deuziñ, evit sevel un delwenn en enor da Nevenos.

Siwazh, goulenñ a reas an teuzer pouez resis ar c'hanol... ha ne oa nemet ur c'hozh pouezerez-ispisiri er barrez!

Penaos ober?
"Lakait ar c'hanol da rusañ betek al lenn", eme ur paotr yaouank, "ha degasit ar bouezerez din. Gwellet e vo pegement a bouez a zo er c'hanol-mañ, m'en tou!"
An deiz war-lerc'h e roas ar c'hanfard pouez ar c'hanol, e-ser nebeut.
Penaos en doa graet evit c'houzout?

Un droiad war vor

Edo Gweltaz, e vreur Salaun, o zad hag o eontr o pourmen war an sod pa fellas dezho kemer ur c'hanod evit treuziñ ur stêr a sparle an hent dirazo. Met re vihan e oa ar vagig: ne c'helle dougen nemet 75 Kg. Bremañ e oa Gweltaz 36 Kg a bouez ennañ, Salaun a oa 33 Kg, o zad 68 Kg hag o eontr 74 Kg...

Penaos en em zibabas ar valeerien evit treuziñ ar stêr ar buanañ ar gwellañ?



Ar re Abegile

Edo daou Abegile, Onenn hag he breur Onen, o c'hoari dirak o zi... Setu ma c'hoarvezas gant ar vestrez-skol nevez tremen dirazo. Toullañ a reas kaoz gant an daou vugel, o c'houlenn digant Onenn: "Pet breur a zo dit?"

- Div wezh muioc'h a c'hoarvezed eget a vreurdeur a zo din, eme Onenn.
- Ha gwir eo, Onen?
- N'ouson dare, Dimesell. Hogen bez' ez eus teir guezh muioc'h a c'hoarvezed eget a vreurdeur ganin.
- Dic'hañtu e ouezas ar vestrez-skol pegement a vero'hed hag a baotred a oa e ti ar re Abegile.
- Ha gouzout a ouzoc'h, c'hsi ivez?



Jedoniezh...

Da ziv eur goude merenn e kuitas ma zad-kozh hon ti da vont da bourmen, o redek 2 Km dindan un eurvezh. Da deir eur e kuitas ma zad an ti ivez, o kerzhet div wezh buanoc'h hag o vont gant an hevelep hent. Kuitaat a ris an ti a-sambles gantañ, war ma marc'h-houarn. O vont da 10 Km/e e ris monedonea etre an daou valeer betek ma voe tizhet ma zad-kozh gant ma zad. Pegement a hent a voe graet ganin neuze?

N' ANKOUAIT KET!!!

GOUEL AR BREZHONEG

E KARABEZ, 28-29-30 A VIZ EBREL 1989



Ac'hanta, tudoù!
...Ha deuet oc'h a-benn d'en em zibab gant ho Tangram? An dis-koulmoù a gavot en niverenn 15! Erru eo an nevez-amzer, merzet hoc'h eus? Setu e kinnigan deoc'h mont d'ho liorz da labourat, hep kuitaat ho kambr: kempennet e vo

**ul liorz
en ho kambr**

An darn vuiañ ac'hanomp a blij dezho lakaat plant da greskiñ. El liorz e vez graet peurliesañ. Bez' ez eus liorzhoù bras, gwez bras ha glazennoù ledan enno, hogen bihan a-walc'h e vez al liorzhoù a gaver e-kichen hon tiez. Hag an dud a vev e kêr n'o devez ket a liorz, peurvuiñ... Ac'hanta, n'emañ ket ken fall an traoù 'vat! Atav e vez tu da gempenn ul liorz en ti - en ho kambr! Aesoc'h e vez aozañ ul liorz en ho kambr eget er-maez evit daou abeg: ne vez ket ho liorz dindan an amzer, ha he gwellet a rit alies, ar pezh a zo mat evit gouzout pegouiz e vez ret ober war he dro...





A-raok klask plantañ traoù e lezimp ul liorzbig da vont hec'h-unan en ho ti! N'eo ket diaes, hogen e vo ret deoc'h gouzout gortoz da lezel an traoù da zont o-unan. Bezit habask enta!

Ezhomm ho po eus podoù bihan evit ho liorzbig: kemerit podoù izel a vez gwerzhet evit ar bleuniou, pe c'hoazh boestou plastik a oa amann, fourmaj gwenn enno da skwer, listri aluminom a vez gwerzhet gwastilli e-barzh, hag all...

Grit toullou bihan e foñs pep lestr, evit lezel an dour da dremen, ha lakait un asied pe ur pladig plastik dindano.



Kit da gemer douar noazh, da lavaret eo douar dic'hlavvez - arabat toullañ letonenn hoc'h amezeg! - diwar ul liorzha a anavezit, pe diwar ribl ur park, bevenn ur geadeg, ur c'hleuz bennak... Lakait ho touar e-barzh ho podoù ha boestou, goude bezañ teunet kement maen ha kement brifenn a oa ennañ evit kaout douar naet. Choukit-en d'le iveañ. Mat! Lakait ho pladù dindan ho peostoù, ha lakait anezho e-kichen ur prenestr evit ma parfe an heol warno.

Ret eo d'an douar bezañ gleb: lakait dour ur wezh an amzer, hogen arabat ober ur poullig! Dav e vefe d'an douar bezañ gleb evel ur spoueenn.

Bremañ, sellit pizh!




Abred pe ziwezhat e teuo plant bihan war wel. Kresket int diwar hadoù a oa kuzh en douar. O lezit da zont bras, evel-se e c'hellot gouzout peseurt plant ez int.

A-feur ma tremeno an amzer e verzet penaos e teu plant zo da vougañ ar re all ha da vout perc'henn war al liorzha en he fezh.

Tu zo deoc'h da verkañ ar blantenn-mañ -plantenn gant bizhier bihan (skarzhoudent) mar fell deoc'h hec'h evezhiañ.

Mar kav deoc'h ez eo re c'horrek ho liorzha da zont, strevit un nebeud hadennoù eus ar re a vez roet d'al laboused. Buan e kreskint, hag aze ivez e vo plant o vougañ ar re all.



N'eo ket ret d'ul liorzha bezañ graet a-blad. Tu zo deoc'h d'ober ul liorzha voulheñvel, a lakaot a-ispilh ouzh lein ho kambr! ...Boulheñvel? Penaos 'ta?

Ezhomm o deus ar plant eus boued ha dour evit kreskiñ: setu perak hor boa lakaet dour en douar ha lakaet hor podoù dindan an heol - diwar goulou an heol e vez fardet o boued gant ar plant. Gouzout a ouzoc'h kement-mañ c'hoazh, sellit ouzh Talabao 13. Ha soñj hoc'h eus? Al luc'helfennerezh! Dour ha boued a vo en hol liorzha voulheñvel ivez evel-just.

Dalc'het e vez dour gant ur spoueenn, greomp gant ur spoueenn neuze. Bez' ez eus boued e-barzh an hadoù, graet e vo gant hadoù neuze.



Kemerit ur spouenn, unan naturel pe unan all. Tu zo deoc'h d'ober ur vouleñ gant dre droc'hañ anezhi gant sizailhoù mar fell deoc'h. Stagit un neudenn ouzh un nozeleñ (unan vray!) ha lakait an neudenn da dremen dre greiz ar spoueenn.


Soubit ar spoueenn en dour, ha dizourit anezhi da c'houde. Trawalc'h a zour a chomo e-barzh!

Kemerit hadoù geot: munut int ha kreskiñ a reont buan. Strewit-i war ar spoueenn c'hieb, ha sankit-i e-barzh toullou ar spoueenn.

Dalc'hit ar spoueenn dre an neudenn, ha soubit-hi en dour ur wech ouhpenn mard eo deuet sec'h (lakait ur plad dindan da viret ouzh an takennoù dour a gouezhañ war leur an ti!).

Lakait ho liorzha a-ispilh ouzh un dra bennak (lein ho kambr?), ha gortosit...

Kentañ tra a raio an hadennoù pa zivaniñ eo ober gwrizioù a sankint er spoueenn. Goude-se e teuo plant bihan glas war wel - heñvel a-walc'h ouzh blev glas e vint. Atav e kreskint war-zu an nec'h, daoust d'ho liorzha bezañ ront!






Marteze n'hoc'h eus kavet spoueenn ebet, pe c'hoazh ne blij ket deoc'h ober ul liorz diwar ur spoueenn... Ne vern! Graet e vo ul liorz diwar un aval-douar!

Dibabit un aval-douar kuilh, ha grit toullou ennañ gant ur skarzh-dent. Kit buan da brenañ ur pakad had sezo, hag unan had beler.

Sankit an hadennoù en toullou bihan. Trawalc'h a zour a zo en aval-douar evit ma tiwanfe an hadennoù.

Tu zo deoc'h da genstrollañ meur a aval-douar gant skarzhoù-dent, da ober ul loen bennak. Tresit un dremm dezhañ gant liv: aes eo da ober war pluskenn un aval-douar!



Mat! Emichañs hoc'h eus peadra da gas hoc'h amzer betek ma 'z erruo an niverenn a zeu en ho ti! Kenderc'hel a raimp gant hol liorz: gwelet e vo penaos ober plant nevez diwar reoù gozh, hag ivez penaos krouñ gweledvaoù brav-eston en ho kamb... ha marteze e vo plantet ur wezenn bennak e-kichen ho kwele (hag e ratre vat emañ toenn ho ti?!). Kenavo!

...Eurêka!

C'hoariomp... (p.14)

EVEL PETRA?	GERIOU-DIRI	AR GAEL-IFERN
1. Du evel askell ar vran.	O	KAVADENN
2. Reuzedik evel ar vein.	GOR	UNHINON
3. Tev evel ur varrikenn.	GORED	NEKETA E
4. Leun evel ur vi.	GORREAD	UVELNUL
5. Moal evel ur vilienn.	DOARE	JABADAO
6. Plaen evel ur billig.	DOR	ELENLID
	O	NLMALE
		NILOJNAK

An torr-penn (p.34)

Pouez ur c'hanol

Lakaet eo bet ar c'hanol e-barzh ur c'hanod, en deus sanket en dour. Gant ur c'hreion en deus merket ar paotr live an dour war kouc'h ar vag. Goude bezañ diskarget ar c'hanol en deus leuniet ar c'hanod gant mein, betek ma tizhe an dour e live kent. Ne chome nemet gouzout gortoz, ha pouezañ a-berniouigoù ar mein war ar bouezerezh vihan. Gwidreüs, neketa?



Jedoniezh

Da 3 eur en doa redet ma zad-kozh 2 Km, ha da 4 eur en doa redet 4 Km. Ma zad, a oa aet kuit da 3 eur, en doa redet 4 Km da 4 eur ha tizhet ma zad-kozh. Ha me, aet kuit da 3 eur ivez, em boa redet 10 Km da 4 eur, anat eo, na petra 'ta!



Un droiad war vor

Treuziñ a ra Gweltaz ha Salaun da gentañ. Distreiñ a ra Salaun gant ar vag, a vo keseret gant e dad e-unan da vont betek Gweltaz. Hemañ a adkemer ar vag, ha distreiñ a ra gant e vreur davet o zad. Treuziñ a ra Salaun adarre, ha lezel a ra ar vag d'e ontr, a dreuz ar stêr d'e dro. Evit echuif e treuz c'hoazh Gweltaz, ha distreiñ a ra gant e vreur. Setu-i holl war ar c'hilenn all! Kenderc'hel a saint gant o fourmenadenn, ha graet e vo an he-velep monedonea evit treuziñ ar stêr en-dro...

Ar re Abegile

Laouen omp o Kemenn deoc'h es eus nav flac'h ha pevar faotr e ti an aotrou hag an itron Abegile. Yac'h emañ a'hoazh ar vamm ha bouar an tad dija.



DANEVELLIT!!

HA TRESIT!!



TALABAO, embannet gant **AN HERE**, 16, straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho koumanant da d**TALABAO**, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 120 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 150 L. Koumanant evit ar broioù estren: 150 L. Chekem da vezañ karget war anv **AN HERE**. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Ebrel 1989. Lezenn c'hall 49-956/16-07-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e Sant-Tonan, BZH 29220 LANDERNE.

Graet e Breizh © **AN HERE**, 1989.